

# CHANSON NEVEZ.

386

1.

-Cousquet out ma speret mes poent eo disuni  
Ha clasq c'hoas ar voyen da zont da gombati ;  
Attaquet ê hon repos gant peder femelen  
Ret eo enem armi ha dont de'n em difen.

2.

-Unan demeus anê a lare un dewez  
Greomp-nia ur chanson ma teir camarades  
Da dressa ar werset en ho dillat  
Nin a rayo dezê bremà peb a flipat.

3.

Chetu'n'em assamblet ar peder plac'h yaouanq  
Da ober ho chanson herwe ho santimant  
Aoalc'h deus a rimou gantê so'n em gaët  
Mes allas ! ar bon san henes n'e medi quet.

4.

Attaquet omp gantê en un etad fesson  
Ha laquet hon hano da bourmen ar c'hanton  
Ha depeignet hon bue en ur stad a fallagriez  
Nemert ar sort a ve erforn na elle dont er mèz.

5.

-Ret evije plac'het e vijach o hayreal  
Pe e voac'h conseillet gant an teod infernal  
Da yean'n em fouret en breujez ar c'hlaquennou  
-Marteze lo po queus da darn eus ho comsou.

6.

Eneum resovlet oc'h a enep ar werset  
Gant cals deus a venjans ep bean meritet  
Nin ne n'omp quet coupabl m'oc'heus quement a soufrans  
Ret evo dec'h gortos heuvriou ho tilivrans.

7.

-C'houi a dlefoa , plac'het enim humilian  
A gortos ar bonheur da dont d'o priata  
Bale hent ar vertu gant prudans ha douç-ter  
-Ha marteze ho po peba potr evit saler.

8.

Gout a ouzoc'h penos eheo an humilite  
Mignonez där vertu ive där garante  
Na n'eo quet gant fureur , gant maliç inhumen  
Eheo, ma'c'hacquisitet quentà amourouzien.

9.

Me'voar erfat penos pa deuan da gompreñ  
-Pa ve cals deus a'hoant, ehé dièz tremen  
-A wijou ar planeden a chanch en un instant  
Ha marteze neuze ho po peb a c'halant.

10.

-Na petore idè o poa-hu quemeret,  
-Na pessort nation amefoa ho quelennet  
Da dransport ho mare bete hon goeléou  
D'ober usach a pot-cambr ebars en hon botou.

11.

-An de varlerc'h ar beure,nin a voa suprenet  
O voelet en pe guis qvoa hon boto rentet  
Ma conclujomp neuze , ma'moamp-nin'lavaret  
-Bet so eur bar orag en pad ma voamp consquet.

12.

Mes evit quement-se nin' voa freneziet  
-O clasq gout a besbro evoamp-nin serviget  
Mes ebars en doetans nin ne n'omp quet bet pel,  
Gout a ouzoc'h ar merc'het ne n'int quet' vit tewel.

13.

Na gredet quet plac'het evemp-nin en coler,  
-Evit eur banac'h dour nin ne n'omp quet tener  
Eur veag-al pa deufet er sort occasionnou  
Tachet da derc'hel sec'h mar gallet ho botou.

14.

Nin ne n'omp quet fachet demeus ho trubuillou  
Me<sup>z</sup>-meus ne garemp quet bean en ho plaçou,  
Mes evit quement-se eno ezoc'h manquet  
N'eo quet ebars en treid a veau amouroustet.

15.

Rac-se eta plac'het me<sup>z</sup> meus an esperans  
Ne scringset mui varnomp ho dent a vedizans  
-Henès a voa eun tourmant evel eur bar carbon  
-Hac a dissirito pa chanchoù ar saizon.

16.

Na guémeret jamès re a superbite  
A-wijou en un instant e chanche a zegre  
Hirie oc'h en triumph carguet deus a joaiou  
Varac'hoas marteze'heus sujet a daërou.

17.

Ha pa vec'h preferet gant guened ha graçou  
N'och quet sur anê bete fin ho deyou  
N<sup>o</sup> poa nep avantach o trouc-coms a'hanomp  
C'houi na n'och quet ive goel metal evidomp.

18.

C'houi oc'heus eur chassé hac a so ranverset  
-Ar c'had eus o redec , ar c'hy oc'heus tapet  
Groet guelloc'h jujamant , ha choazet woelloc'h parti  
-Disquet pelec'h tenna ha piou da exantin.

19.

An nep'neus groet ar son,a so eur marc'hadour  
A þrefer mui ar guin evit ne ra an dour  
-Ma ne houlet quet credi,marteze c'houi a voelou  
Hac e so guirione eun darn deus ma c'homsov.

20.

Me'so eun den yaouanq o tremen ar c'hartier  
Hac a so a boan din enem denn a vizer  
Ebars em marc'hajou n'emeus nep avantach  
-Biscoas n'on sortiet deus ma bugaleach.

21.

Contant ðn o wewa en un degre izel  
-Avoalc'h a yadou ameus evit merv  
-Eur veach an amzer pa ve, crev ar sezon  
- E ra din plijadur rein un dems d'am c'halon.



F. LECAVALIER.